



GOUEL VARIA HANTER-EOST
=====

Signum magnum apparuit ...

Gaudeamus omnes in Domino ...



Bur-zud mantrus, o ske-di en neñv-vou! Krou-a-du - rez, di-var-vel eo Ma - ri;



Korv hag e - ne e ki-chen an Ao-treu, Ez eo an nor 'vi-dom o ti - ge - ri.

Burzud mantrus, o skedi en neñvou!
Krouadurez, divarvel eo Mari;
Korv hag ene e kichen an Aotrou
Ez eo an nor 'vidom o tigeri.

Diskan


*Bezit laouen, poblou kristen bodet
Evit lida eun deiz a levenez;
Er baradoz emañ hirio douget,
lavaron oll meuleudi ar Werhez.*

O lugerni, an heol hag ar stered
'Jom eviti disliv o sklerijenn.
Digemeret e familh an Dreinded
Sent hag elez a zo he hurunenn.

Madou an neñv a zo enni fiziet
Da zigañ nerz d'ar paour ha d'ar peher;
Gant an anken, an drubuilh m'eo sammet,
Eur zell hepken hag e kerz dibreder.

Bleniet bemdez e karantez Doue
Buhez an den a vezo talvoudus;
Gant he roudou a ma kendelh da vale
E tiwano er vuhez peurbadus.

Burzud mantrus ~~pa~~ pa skedo en neñvou
Eus ar maro savet korv hag ene,
Trezet ganto traonienn ar hañvou,
En dro d'o Mamma, oll vugale Doue.



Yann TRANVOUEZ

E Gwisseny, Gouere 1969.